

HEKLEV SEVENADUREL



A-dreuz lenn

2



Petra nevez ?

10




Notennoù

22



Herve LATIMIER & Emmanuel PASTORI

**SKEUDENNOÙ, *images*
& *points de vue*,**
gant Fañch Le Henaff,
Locus Solus, 2019,
177 pajenn, 25€



Anavezet eo Fañch an Henaff e Breizh. Ar re n'anavezont ket anezhañ o deus gwelet deiz pe zeiz unan eus e oberennoù, surmat. Krouet en deus skritelloù evit nouspet aozadur, gouel, abadenenn pe stourm.

Kalz anezhe aozet evit stourmoù ne lezont ket diseblant lennerien *Al Liamm* a gredan. (Radio TeleBrezhoneg ; Diwan ; Indianed Amerika ar Su, ar Peoc'h...). Lod a zo e koun unan

bennak a bouez (Chico Mendès, Madeleine Lagadec...), unan zo enep un den displijus-meurbet (Pasqua), unan all c'hoazh awenet gant gwerzennoù bet skrivet gant Anjela Duval... N'eo al listennig-se nemet un alberz diwar skritelloù bet merzet o follennata al levr. Pet ha pet diwar-benn festoù-noz, abadennoù, degouezhioù liesseurt... Souezhet on bet gant niver ar re zo bet savet evit

pezhioù Ar Vro Bagan betek en em c'houlenn hag-eñ ne oa ket an holl anezho. Dreist eo bet mennozh Fañch kinnig un darn vrav eus ar skritelloù bet krouet gantañ hag un toullad oberennoù all en ul levr kaer gant skeudennoù dispar. Ur sell war daou-ugent vloaz a groudigezh. Rak n'eo ket gant gerioù e tañvaer oberenn ur grafour met en ur sellet outi.

Ouzhpenn bezañ grafour ez eo Fañch an Henaff krouer tipografek. Gantañ eo bet savet ar stumm lizherennoù *Brito*. Implijet eo bet *Brito* e *Skeudennoù* evel-just. Kit da lenn al lodennoù brezhonek evit gwelet pegen brav e teu ar stumm bet dibabet evito. Divyezhek eo al levr. Sikouret eo bet Fañch gant Ronan an Henaff, Annaig Haskoed, Jil Penneg hag Ofis ar Brezhoneg evit an testennoù brezhonek.

Pajenn 171 e kaver un toullad deiziadoù pouezus. Meneget eo e gejadenn gant Alain Le Querrec, ur c'hrouer skritelloù eus an dibab eus Bro-Gemper. Levezonet pe awenet eo bet gantañ moarvat. Merzout a reer pegen bras eo levezon Polonia 'lec'h ma studias arz ar graferezh.


Ur beajour bras eo, plijout

a ra dezhañ dizoleiñ broioù ha kejañ gant tud. Breizhad emskiantek ha stourmer. Digor war ar bed, dedennet gant ar pezh a sell ouzh Mab-den hag ar c'hudennoù a sav er gevredigezh. Stag eo ouzh bro e familh ivez. E Lokorn (pe Lokronan evel ma lenner el levr) en deus staliet e atalier e 1986 hag eno emañ bepred...

Ul levr da vezañ lennet, sur, met dreist-holl da vezañ sellet outañ. Ur gejadenn gant un oberenn hag ur c'hrouer.

HL

**Des printemps en
Bretagne,**
gant Jean-Michel
Le Boulanger,
Éditions Goater, 2019,
204 fajenn, 15€



Kustum e vezer da lenn arnodskridoù diwar bluenn Jean-Michel le Boulanger (*AL* niv. 406 ha 421). Ur romant eo e oberenn ziwezhañ. Ur romant istorel eo. Tremen a ra an traoù da vare ha diwar-benn trec'h micherourezed friturioù Douarnenez, gant o lugan brudet « Pemp real a vo ! », dilennadur Daniel Le Flanchec da vaer e miz Here 1924 gant Joséphine Pencallet war e listenn, hag un toullad darvoudoù all. Tud vru-det pe brudetoc'h a gaver a-hed ar romant.

François Tanguy, an dudenn bennañ, zo mab yaouankañ un tiegezh labourerien-douar eus Gwengamp. Aet eo d'ober studioù da Roazhon ha mont a ra da gelenner galleg e Skol beske-taerezh Douarnenez. Heuilhañ a reer anezhañ evel-just, petra 'ra, petra 'soñj, petra 'dru-builh anezhañ, gant piv e kej...

Amañ emañ kostez istorel ar romant rak kejañ a ra gant tud o deus bevet ha stourmet pe krouet d'ar mare-se : Daniel Le Flanchec, Yann Sohier, Max Jacob, François Menez. Sur ec'h ankouaen reoù zo. Unan 'm eus c'hoant menegiñ ispisial : Fañch al Lagad. P.108 e kaver anezhañ « ... *un Stéphan, borgne, militant socialiste aux tendances libertaires, un buveur d'eau qui bénéficiait sur les quais d'une grande autorité morale* ». An anv a lâre din un dra bennak. Bet on o c'houlenn gant Herle Denez (mab da Bêr Denez) hageñ ne oa ket eus e familh. Setu e respont : « *Ya, Fañch Al Lagad (François STEPHAN e galleg flour) 'oa tad-kozh din, tad ma mamm 'vel-just. Anarkour ha sokialour e oa ha bet eo bet e penn an diskrogoù-labour e penn kentañ ar c'hantved tremenet ha dilennet e ti kêr Douarnenez*

e-pad ur prantad. Brudet bras e oa war an aod. Ur “sako” ‘veze graet desoutañ dre ma n’en doa morse kollet martolod ebet war vor ha mestr unan deus bagoù sardin gwellañ ar porzh.

Tro ’m eus bet da enrollañ Charles Tillon o kontañ e oa deut da Zouarnenez da glask kemer penn an diskrog-labour e 1924 evit ar strollad komunour.

Soñj mat en doa ma zad-kozh dre ma ne oa ket evit gouzañv ar gomunisted o tont deus Pariz evit kemer penn an darvoudoù. »

Pa glever a-wechoù ez eo bihan ar bed... Goût a oar Jean-Michel eus familh piv ’oa Fañch al Lagad moarvat...

Bevañ ’reer darvoudoù ar bloavezhioù 1920 er porzh bras a oa Douarnenez d’ar c’houlz-se. Ur sell resis a zo war ar gevredigezh e Breizh koulz e Treger hag e Douarnenez. Santout a reer pouez ar brezel bed kentañ. Met ur virvidigezh war bep tachenn.

Istorel, sur, met ur romant da gentañ. Ur bern tudennoù zo bet krouet gant ar skrivagner evel-just. Unan eus ar re zeden-nusañ anezho eo an itron Bizien, gwreg unan eus mistri ar friturioù. Digor he spered war an arzoù ha brokus... Merc’hed all

kreñv o fersonelezh a zo ivez, en o-zouez Anne Le Gall.

Kavet em eus soutil an doare ma taolenn ar skrivagner Daniel Le Flanchec. Ne guzh ket tuioù forc’hellek e bersonelezh. Fromet on bet gant poltred Yann Sohier, mignon da François Tanguy. Entanet, gredus, kar-an-dud, kar-e-bobl ha kar-e-vro... un den reizh.

Dedennus eo an dudenn bennañ daoust ma c’hell bezañ hegazus a-wechoù. Techet eo François da zielfennañ re an traoù ken n’eo ket barrek da stourm en ur framm hag e chom alies un tamm a-gostez daoust d’e vennozhioù diazez. Santet ’vez ez eo un tamm nec’het gant e saviad : o tibab mont da studial hag o tilezel micher e dud hageñ n’eo ket pellaet diouzh e dud, e vignoned mell-droad eus *En Avant*, hag e renkad sokial ; trubardiñ anezho en ur stumm ? Bezañ chomet ar mab nemetañ goude ma voe lazhet e dri breur er brezel ha marvet e vamm diwar-se a lak anezhañ diaes. Tuioù lent ha diasur zo gantañ. Deneloc’h a-se eo.

Arabat din kontañ an holl draoù bevet gant François Tanguy. Gwelloc’h deoc’h mont da zizoleiñ anezhañ.

Kalz eus ar prederiadennoù a zo re Jean-Michel Le Boulanger a-zivout ar politikerezh, emdroadur ar gevredigezh, darempred pep hini gant Breizh hag ar brezhoneg met dont a reont en un doare naturel en istor.


Skrivet mat eo ar romant ha lenn a reer anezhañ buan ha gant plijadur. Gant ur mousc'hoarzh

a-wechoù ivez : p.104 e lenner « *Un slogan était devenu célèbre, Pemp real a vo, cinq sous nous aurons...* ». Brudet eo al lugan, sur, met un tamm ispriziet an droidigezh...

HL

Notenn : miret em eus anvioù an dud evel m'int skrivet el levr. Dibab ar skrivagner eo...

Le breton, langue des mères, langue des frères,
gant Marie-Thé Legendre,
Yoran Embanner, 2019,
144 fajenn, 13€



Er gerig kinnig e lenner un nebeud goulennoù a-zivout roll ar merc'hed evit treuzkas (pe get) ar yezh er familh.

A-benn ar fin em eus kavet e oa ledanoc'h : evel-just ez eus kaoz eus emzalc'hioù disheñvel ar baotred hag ar merc'hed e-keñver ar yezh met eus ar skol ivez, eus pouez sevenadurel hag ekonomikel ar rummad mestroniour, eus plas an div reizh er gevredigezh.

Unan eus kentelioù al levr : n'heller lakaat abeg ebet evel

abeg nemetañ evit dilezel ur yezh. Ur gentel all a gaver e rakskrid Philippe Blanchet : « *Ces travaux [re imbourc'hierien o deus studiet ar c'hemm yezh meneget gant M.-T. Legendre] ont définitivement détruit le mythe de l'adhésion volontaire, librement consentie, à la langue française par les populations qui se seraient inclinées devant la supériorité du français...* ».

Gwelet e vez ez eo gwir ez eus emzalc'hioù disheñvel etre paotred ha merc'hed e-keñver

dibab yezh, gwelet e vez levezon ar skol ha, tra souezhus, levezon ar vreudeur hag “ideologiezh” ar familh. Miret eo bet muioc’h ar yezh gant ar merc’hed o doa kalz breudeur... Gwelet e vez ivez ez eo an dibab yezh (ar brezhoneg amañ) en ur familh un emglev er c’houblad ha n’eo ket dibab unan nemetken.

Levezon ar simbol a c’hell bezañ forc’hellek ; menegiñ a ra an aozerez un den en deus gouzañvet ar simbol hag en deus nac’het kaozeal galleg betek fin e vuhez (pp.87 ha 128) ha levezonet izili familh e c’hoar peogwir e veve ganto.

Daou dra zo sklaer er studiaden. Dibabet he deus M.-T. Legendre studial familhoù ma oa bet miret pe adkavet ar yezh, sell pozitivel. Diaes eo, da’m meno, lakaat holl elfennoù al labour da dalvezout evit ar familhoù niverus m’eo bet dilezet ar brezhoneg eta. Bihan eo niver ar familhoù bet aterset, c’hwec’h en holl. Komz a ra an aozerez eus ar gudenn-se pp.38 ha 39 o keñveriañ ar sokiolegiezh kementadel hag ar sokiolegiezh doareadel...

Ar pouezusañ eo ez eo talvoudus-kenañ an atersadennoù (bet troet holl e brezhoneg) hag


an dielfennoù graet war o divout. Gwelet a reer o deus miret familhoù zo ar yezh, gwelet a reer abegoù met n’eus hini ebet a vefe trec’h mik war ar re all. Chom a reer un tamm war e c’hoant met kavout a reer ivez peadra da brederiañ. Pal ul labour enklask neketa.

Lenn a reer an oberenn gant plijadur.

Souezhet-bras on bet koulskoude gant ar frazenn ziwezhañ ne ’m eus ket komprenet he ster : « *Comme les Armoricaains sont passés au breton, les Bretons sont passés au français, dans une aussi grande violence. Mythique, elle aussi* ». Diaes eo keñveriañ ur gwir vojenn (s.o. pennad J.C. Cassard « *Le génocide originel* » en *Annales de Bretagne et des pays de l’ouest*, 1983, 90-3, pp.415-427) gant ar pezh zo c’hoarvezet etre fin an XIX^{vet} kantved ha hanter an XX^{vet} bet studiet... Ra vin sklêrijennet gant ar re niverus a lenno al levr...

HL

Civilizations,
gant Laurent Binet.,
Grasset.,
336 pajenn, 16€



Ul levr souezhus eo. Ul levr skiant-faltazi n'eo ket, arabat deoc'h gortoz lenn traoù diwar-benn pladennoù-nij hag all. Koulskoude e vez kavet faltazi e-barzh, ur bern zoken. Ar faltazi-se a zo gwirheñvel hag e veajer en amzer dremenet...

Un ukroniezh eo kentoc'h. Petra an diaoul eo se emezit-hu ?

Gouzout a reomp eo bet dizoloet Amerika gant Kristof Kolomb. Ar skrivagner, eñ, a glask ijinañ penaos e vije c'hoarvezet an traoù ma vije bet ar c'hontrol, da lâret eo ma vije bet trevadennet Europa gant ar pobloù amerindian da vare an Azginivelezh.

Dizoloet e oa bet Amerika an Norzh gant ar Vikinged dija, met ar skrivagner a lak anezho da vont pelloc'h c'hoazh, betek Kuba. Reiñ a reont d'an dTaïoned sekredoù an houarn hag ur

bern mikroboù ha viruzoù war memes tro, peadra da sikour anezho en dazont.

Goude ur pennad hir a-walc'h ha darvoudoù a bep seurt e teu un nebeud bagoù en Europa, sturiet gant Inkaed, e Bro-Bortugal evit bezañ resis.

Kompren a ra buan a-walc'h an Inkaed ar mad a c'hellont tennañ eus ar reuz a vez o ren en Europa d'an ampoent. Brezelioù a zo e pep lec'h, etre ar stadoù da gentañ, met ivez etre ar Gato-liked hag ar Brotestanted.

Ar c'hargadoù aour degaset dizehan gant al listri inka a sikouro ur bern tud da blegañ ouzh an Inkaed hag o relijion nevez...

Ne vo ket skrivet amañ ar pezh a c'hoarvezo da-c'houde, anat deoc'h. Penaos e teuo a-benn Atahualpa da ren war an Impalaeriezh alaman ha roman, petra 'vo planedenn rouantelezh

Bro-C'hall ha hini Bro-Saoz ?
Petra a raio ar Pab ?

Gouzout a refet hiroc'h en ur
lenn al levr dispar-mañ.

Liesdoare eo al levr. Kavet e
vez ennañ meur a zoare da skri-
vañ, lizheroù, ur gronikenn, bar-
zhoniezh... Mousfent a zo ingal

ivez, ar pezh a zegas plijadur
ouzhpenn. N'eo ket ul levr dis-
ter avat. Lakaet en deus ac'ha-
non da brederiañ war an amzer
dremenet, ha roet en deus din ar
c'hoant da zeskiñ muioc'h war
draoù zo.


EP

PETRA NEVEZ ?



**Magali BARON,
Herve LATIMIER,
Emmanuel PASTORI &
Malo BOUËSSEL du BOURG**

An Itron de Saint-Prix,
gant Yvon Le Rol,
TIR,
736 pajenn, 23€



Evit ar wech kentañ e vez kinniget deomp dastumad *An Itron de Saint-Prix* en e bezh, tost da vat. Ul labour tezenn eo, kinniget gant Yvon Le Rol e Skol-veur Roazhon. Er pennad digeriñ, puilh an eostad titouroù ennañ, e vez lec’hiet labour an dastumerez en hec’h amzer, en Europa hag e Breizh. Piv e oa an

Itron de Saint-Prix ? Perak ha penaos he deus kaset da benn he dastum e kornioù-bro Sant-Servez, Plouyann ha Montroulez ? Peseurt darempredoù he deus bet gant an dastumerien all ? Peseurt mod he deus lakaet ar pezh a gleve war baper, gant peseurt reizhskrivadur, gant petore arliviou rannyezhezhel ? Pal

an embannadur-mañ, da lâras Yvon Le Rol, a zo « reiñ enor d'un itron ha d'he labour [...], pa oa bet an itron-se eus rummad kentañ dastumerien lennegezh dre-gomz Breizh, Aymar de Blois hag Alexandre Ledan en o zouesk ».


Gant kement kanaouenn, gwerz, kontadenn pe pezh-c'hoari a zo, e vez kinniget forzhik notennoù, evezhiadennoù ha prederiadennoù istorel, yezhel ha lennegel... Ur pezh mell labour, resis ha strizh, hag ur pikol levr... Evit abegoù skiantel en deus dibabet Yvon Le Rol mirout reizhskrivadur orin an testennoù, ha ret eo anzav e skuizher buanoc'h gant ar strivoù rekis. Ne vo ket lennet al levr-se gant an holl, 'm eus aon, daoust ma vez kinniget bewech un droidigezh c'halleg goude an destenn orin... Talvezout a rafe ar boan, marteze, embann un eil levr e brezhoneg standard, pe o tiskouez keñver-ha-keñver ar stumm orin hag ur stumm standard, evit ledanaat tachenn al lennerien. Talvezout a rafe ar boan, a lavaran, rak fromet e vezer, boemet a-wechoù gant kaerder testennoù zo. Len-nit an hini gentañ paneveken,

d'ober ho soñj : *Ar minores pemp bloas*. Helavar an titl.

N'eo ket anavezet an Itron de Saint-Prix en tu-hont d'he anv, bet meneget amañ-hag-ahont gant an dastumerien all. O vorediñ e oa he c'haieroù e levraoueg manati Landevenneg. Kervarker, Luzel, hag Anatol ar Braz o deus kemeret o c'hreñv war ar re all, hep rat dezho, betek o c'huzhat. O lenn pezhioù zo e dastumad an Itron de Saint-Prix, evelkent, n'heller nemet stadañ, adarre, pegen fonnus ha pegen kaer eo bet hol lennegezh pobl hag hol lennegezh dre gomz, deuet betek ennomp dre hanterouriezh foeterien-bro ha klaskerien-vara.

MbdB

Diougan ar Seizh Sant,
gant Yann Bijer,
Al Liamm,
156 pajenn, 12€



Laouen e vo lennerien roman-
toù-polis Yann Bijer oc'h adka-
vet ar c'homiser Kaou Kemener
kenkoulz hag e geneil Ronan
Riou. Souezhusat tra, emañ bre-
mañ ar Bigouter Kaou Kemener
o chom e Lannuon, hag arben-
nikaet eo deuet da vezañ war an
enklaskoù diwar-benn ar spon-
terien. Ar wech-mañ en em gavo
al lec'h-torfediñ e-kreiz maezioù
don Bro-Dreger, da-geñver par-
don etrerelijiel Ar Seizh Sant, a
vez dalc'het bep bloaz e parrez
ar C'houerc'had. Rak ar bloaz-
mañ ez eus bet kaset d'ar polis ur
bilhed dizanv o venegiñ ar par-
don, delwenn sant Mark, ha
“kudenn an dour-beuz”. E-barzh
an delwenn e kav an daou boliser
un bilhed all da ziluziañ, skrivet
en ur yezh kevrinus... Estreget ur
farsadenn e tle bezañ, rak prestik
e vo drouklazhet Imam moske-
enn vras Monastir, peadra da
blantañ freuz ha reuz er pir-

c'hirinaj islamek-ha-kristen a zo
tonket da sevel liammoù a
beoc'h etre ar relijionoù.

Hep mar eo an doare da livañ
al lec'h unan eus brasañ plija-
durioù al lenner, a ra anaoude-
gezhgantbourkarC'houerc'had,
gant chapelig ar Seizh Sant
savet war an daol-vaen a zo en
he c'hev, hag evel-just gant ar
presbital kozh m'emañ Kaou
Kemener o lojañ a-drugarez d'e
econtr, ar chaloni Tin Nedeleg.
Aergelc'h didrouz ar presbital,
c'hwezh ar voulouz kozh hag ar
plañchod koaret, arrebeuri hen-
gounel, a vez gwelet ha klevet
fraezh diouzh red ar bluenn.
Kontet e vez dre ar munud istor
ar chapel adalek ar ragistor
betek ar pardon etrerelijiel dia-
zezet e 1954 gant Loeiz Massi-
gnon, en ur dremen dre vojenn
ar Seizh Sant hunet, deuet da
vezañ kehelet er C'houerc'had
er VI^{vet} kantved. En tu all da

gontañ traoù dedennus a-fet istor e klask an aozer taolenniñ stad-spered tud ar vro, o dez keuz a-wechoù d'ar gizioù kozh, ha na vezont ket a-unan a-zivout an emgavioù islamek-ha-kristen. Gwir eo e vefe c'hoant mar-teze gant al lenner da vont donoc'h en aergelc'h hag e braventez ar pardon, da welet ar bannieloù, an tantad, da glevet ar c'hantikoù, da gemer perzh e livioù liesseurt ar pedennoù, degaset gant meur a hengoun. An daolenn ne vank ket avat a vuhez nag a vousefent, pa liv an aozer tudennoù ar garabasenn Janig hag ar c'hloc'her Zidor Pennkaled, ar skipailh gouren anvet *Spontused Koad an Noz*, an dud a-youl vat na reont ket fae ouzh ar c'hig-sall, pe ar Chaloni Nedeleg en defe a-walc'h ur banne hini-kreñv da zifromañ goude kement a strailh.

Pell ahont da vourk ar C'houerc'had e kas avat ar steuenn. Adalek ar penn-kentañ eo liammet an enklask ouzh "kudenn an dour-beuz", a c'hellfe tennañ kenkoulz d'ur vojenn eus ar Bibl ha da zalc'hoù geopolitikel evel tommadur an hin pe surentez Stad Israel. Gant entan e heulier kao-

zeadennoù kouvidi ar presbital, en o zouez un imam hag ur rabin, a-zivout raktres foll un douaroniour a glaske krouiñ ur mor diabarzh e-kreiz ar Sahara e fin an XIX^{vet} kantved, pe a-zivout hent mojenn an dour-beuz eus Bro-Vezopotamia betek istor liñvadenn Kêr-Is. Broudet e vez ijin al lenner, ha gant kevrin ar Skritur santel e red ur gridienn dre e gorf, pa glask ar c'homiser diluziañ an dornskrid kavet e delwenn Mark, ha divinout ster ar c'homzoù : « Diwall Israel eus ar pedervet gwalenn ». Savet-mat eo ar steuenn, kement hag an doare da zirouestlañ an afer ha da c'hoari gant ar pezh emañ al lenner o c'hortoz.

Koulskoude e vez tapet disouezhenn un tamm a feur ma 'z a an enklask war-raok war e bouez, o santout e vez degaset nebeut a elfennoù nevez, ha ne c'hoarvez nemeur a eurioù ha dizeurioù a lakafe al lenner da gaout diskred war hini pe hini eus an tudennoù, a-raok cheñch ali trumm meur a wech. Adalek ar penn-kentañ emañ Kaou Kemener en disfiz ouzh un den e dok mod an Tirol, ha treiñ a ray er memes kelc'h betek ar fin. Gwall c'houstadik e chom al lusk, gwall zisliv ivez ar

poliser, hep na zeufe war-wel perzhioù dispar e bersonelezh. Gwir eo en deus un darempred dedennus gant e geneil “Al Louarn”, a ra anezhañ “Mabig” diouzh e du, gant fent ha tene-ridigezh. Met ne vez ket santet e spurmanter ar wirionez a-druga-rez d’un den lemm e spered, entanet e holl varregezhioù o klask diluz d’an afer. Eus an diavaez e teu an diskoulm a-benn ar fin, pa resev ar poliser titouroù nevez e Roazhon digant ar re a-us dezhañ, hep na vefe ar santimant ez eo bet diskuliet ar wirionez tamm-ha-tamm a-druga-rez da fri tanav an haroz.

Ne vez ket trenket evit-se ar blijadur degaset gant yezh yac’h Yann Bijer, ken naturel ha flour he son. Daoust ma n’eus ket liv kreñv a Vro-Dreger war an destenn – ar pezh a zo peurreizh ! – e vez klevet mat an tudennoù o komz etreze, a-bouez un toullad *Fidamdoustik !, Fei ! pe Ichê !*. Morse ne ziskrog an evezh diouzh ar yezh bev-buhezek-se, a chom aes a-walc’h da lenn, ha pa vefe gwall stank an disple-gadennoù a-zivout an istor, an douaroniezh pe ar politikerezh etrebroadel. Bourrañ a reer ivez gant an doare mousfent didrouz ha diseblant a zeu war-wel a-hed

ar romant, evel pa vez meneget meur a wech, evel un diskan droch, al lochennoù lapined o vreinañ e foñs liorz ar presbital. Unan eus an arroudoù plijusañ a vez kavet er fin, p’emañ ar poliser o kuitaat ar presbital beure mat da vont da Roazhon ; ha setu eñ o “laerezh” war daol ar gegin un hanter dousennad krampouezh, en ur soñjal er pezh-c’hoari gant Jakez Riou ma tistag Izidor un anduilhenn a-istribilh e siminal e dud, a-raok tec’hout da vont war sikour Nevenoe... A-druga-rez da seurt bommoù turgnet-brav ne gavo ket al lenner hir e amzer ; ouzhpenn-se en do moarvat c’hoant-bras da vont da weladenniñ ar chapel hag ar maezioù ac’h a d’ober leurenn ar romant.

MB

**Légendes bretonnes,
Danevelloù a Vreiz,**
gant Adrien de Carné (Barz
an Arvor) ha Maurice
de Becque,
Editions des Régionalismes,
138 pajenn, 27,50€



Peseurt diforc'h zo etre ur marvailh hag un danevell vurzhdus, a c'houlenn Barz an Arvor (Adrien de Carné) en e rakskrid ? Ar marvailhoù a zo kontadennoù burzhdus hag a vez klevet dre ar bed a-bezh. Etrebroadel int neuze. Uheloc'h eo an danevelloù burzhdus, hervez Adrien Carné, ha trec'h d'ar marvailhoù, rak « Eun danevell vurzhdus a zo an hini ma 'z eus, enni, atao, traou a zell ouzh ar relijion pe draou a zell ouz an istor, hag, a-wechou, traou a zell, war eun dro, ouz ar relijion hag ouz an istor. [...] Mar-d-ema spered an den o ren war ar marvailh, gand e droiou, e zistroiou, e wiziegezh, e ijin, ene an den eo a ziskouez, en danevell vurzhdus, e galoun, e zoareou mat, e garantezh, e zantelezh, e daoliou kaer ». Ma...

Embannet e oa bet levr Barz an Arvor e galleg e 1921, ha troet gantañ e 1922 e brezhoneg Leon. En adembannadur-mañ,

kinniget gant *Editions Régionalistes*, ez eus bet lakaet keñver-ha-keñver ar stumm brezhoneg hag ar stumm galleg evit ar wech kentañ. N'eus bet cheñchet tra ebet nag er yezh nag er reizhkrivadur orin. Aes-tre e vo lennet gant an holl avat. Peder danevell a ya d'ober al levr. Plijus int ha skrivet en ur brezhoneg bev-mat. Hogen, ar skeudennoù eo a ro un dalvoudegezh dibar d'al levr. Pezhioù engravet ha livet gant Maurice de Becque a vamer outo. Ul labour a-feson, ma vez mesket ar stil "arz nevez" gant ijin danvez Breizh. Maurice de Becque a oa ur skeudenner brudet, en doa kinklet levrioù Jack London, Kipling... M'emaoc'h o klask ur mennozh evit ur prof kaer, na chomit ket etre daou soñj !

MbdB

Gwim,
gant Jean Giono,
brezhoneg gant
Thomas Loyer,
Mouladurioù Hor Yezh,
11 €



C'hoarvezout a ra an istor e Aubignan, ur gêriadenn faltazius a bProvañs, nepell eus Manosk. Bevañ a ra Panturl e-unan-penn e-barzh ar gêriadenn-se, bet dilezet gant an holl annezidi. Pa grog an istor e oant c'hoazh tri o chom e-touesk an dismantrou, met ar gov kozh, pevar-ugent vloaz dezhañ ac'h a kuit evit kavout repu e ti e vab, hag eben, intañvez, ac'h a diwar-wel a-daol-trumm goude bezañ touet da bPanturl e kavfe ur vaouez dezhañ.

Mont a ra Panturl da ouez. Bevañ a ra diwar jiboesaat, ha komz a ra outañ e-unan.

Cheñch a raio an traoù penn-da-benn pa raio anaoudegezh Panturl gant ur plac'h, Arsouio he deus savetaet e vuhez pa oa war-nes beuziñ. Adalek ar mare-se e kemmo an traoù tamm-ha-tamm. Buhez a vo en-dro en ti,

ne vo ket loch ur jibouesaer nemetken anezhañ.

Ar chaseour a zeuio da vezañ ur peizant, hag an douar a oa chomet fraost a zougo estoù kaer.

Ar gov kozh, diwar glevet e vo buhez en-dro er gêriadenn, a grog da ouelañ. Daeroù a levenez int, hag ur prof a-feson a raio da bPanturl, ur prof a berzh un den a oa gwechall ur mailh war e vicher.


Ar garantez eo tem pennañ al levr. Hi an hini eo ar c'heflusker a vroudo an daou zen da gregiñ gant ur vuhez nevez. Arsouio a oa o kantreal a gavo un ti dezhi, ha Panturl a vo doñvaet ganti. Un istor a-vremañ a c'hallfe bezañ e gwirionez peogwir n'int ket dimezet, na dirak Doue na dirak ar Stad, ha ne reont ket forzh. Bugale an Natur int.

An Natur ivez a vez roet ur plas pouezus dezhi. Reiñ a ra Giono anvioù plant ha loened en un doare stank. Bev-mat eo-hi, an avel zoken a vez deskrivet a-wechoù evel ur boud bev. Bevañ a ra an div dudenn e-kreiz an Natur, ha bevañ a reont diwar he frouezh stank ha saourus.

Ar gwim, ar geot o kreskiñ adarre goude bezañ bet falc'het,

EP

Pikoù Mab e dad,
gant Edouarzh Ollivro,
Brezhoneg gant Jakez Konan,
An Alarc'h Embannadurioù
334 fajenn, 13,50€



Unan eus al levrioù brudetañ e Breizh eo *Pikoù mab e dad*. Edouarzh Ollivro (1921-1982) a oa bet ganet e Lannuon ha desavet e Louaneg. Daoust ma oa aet war ar polikerezh (bet maer Gwengamp, kannad ha prezidant ar *Strollad Kreiz er Bodad Broadel*, eil prezidant ar CELIB), e oa danvez ur gwir skrivagner ennañ. N'en deus lezet deomp nemet ur pemp levr bennak avat, sorbet ma oa gant e gargoù micherel. E levrioù all n'o deus ket graet kement a berzh ha *Pikoù*, goude ma talvezont bezañ lennet. Ur skrivagner denelour eo Edouarzh

Ollivro, tost ouzh an dud vunut. Mont a ra war-eeun e don-donañ an ene. Ken ez a bihan kalon Yann lenner alies, goude bezañ c'hoarzhet e walc'h.

Pikoù mab e dad a voe embannet e ti *Plon* evit ar wech kentañ e galleg e 1954, hag adembannet meur a wech abaoe. Troet eo bet en alamaneg e 1955, e turkeg e 1977 hag e brezhoneg e 1983 gant *Hor Yezh*, a-drugarez d'ur skrivagner tregeriat brudet all : Jakez Konan. Brezhoneg bev-mat, liv yezh Treger warnañ. Intret eo ar skrid, koulz e galleg hag e brezhoneg gant spered

goapaer Tregeriz. Edouarzh Ollivro a oa laouen-bras e vije bet troet *Pikoù* e brezhoneg, a zisplege Per Denez. Rak brezhoneger a-vihanik e oa Edouarzh Ollivro, ha tomm e galon ouzh *Pikoù*, en doa sunet e voued en e eñvorennoù bugaleaj. Enrollet eo bet al levr war ur bladenn vinyl gant mouezh Yves Philippe, hag ur stirad tele a oa bet tennet dioutañ e 1974.

« Breizh he deus he *Poil de carotte*, he *David Copperfield* », a embanne Jean-Charles Perazzi. Soñjal a rafen-me e *Brezel ar boutoniou* kentoc'h, pe e *Gloar va zad*. Nemet n'eo ket gant kan skrilhed-gwez Provañs e vezer boemet amañ. Gant ar vuhez e Bro-Dreger e-kreiz an XX^{vet} kantved ne lavaran ket. Kozh eo al levr, 'mit-hu. Ya, kozh eo, met buhezek ha kempred eo c'hoazh, m'en tou deoc'h, ha gouest da reiñ ur c'hofad plijadur d'ar vugale, hervez am eus merzhet gant ma re ! Kalon Mab-den ne cheñch ket kalz, daoust ma tro ar bed en-dro deomp d'ar red-tan-put.

Troioù-kaer ur paotrig etre e zaouzekvet hag e bemzekvet bloaz en ur skol-lojañ a vez kon-tet deomp. Temz-spered ur marc'h-blein en deus *Pikoù*. Met

n'emañ ket e penn ar c'hlas evit a sell an notennoù. Eus mignonezh ez eus anv, eus darempredoù etre ar skolidi yaouank hag ar re goshoc'h, eus buhez turmudus an hunva, eus entan ha daeroù ar c'harantezioù kentañ, hep disoñjal ar foot hag ar marc'h-houarn, a zo divronn dihesk Bro-Dreger... Na fentus ha dudius danevell an aotrou beleg Kadig, bet troet e gabell e boest lizhiri kuzh gant *Pikoù* ha Mari-Renea... Rak estreget *Pikoù* a zo livet kaer el levr : Tad Benne'hoad da gentañ, an esperadenn a zense, ardamezus eus nep Tregeriad zo. Tad *Pikoù* eo. Ur brabañser touet, buanek ha bugelek, met un den tener e galon.

Talvoudegezh al levr a vez kresket gant abadennoù donoc'h ha krisoc'h ivez. Istor *Pikoù* o treiñ kein d'ar reder-bro, da skouer. Piv ac'hanomp n'eo ket bet laosk e galon ur wech en e vuhez ? Ha c'hoazh, danevell fromus Kreozenn hag e vamm. Bevañ a reomp gant *Pikoù* devezhioù diwezhañ ar vaouez kozh-se, a zo o c'hortoz he mab a-raok rentañ hec'h analad diwezhañ. En aner... Aet eo Kreozenn da bPariz da gas e studioù. Ijinour eo deuet da vezañ. Ur penn-bras. N'en deus ket pedet e vamm d'e

eured gant ur vourc’hizez yaou-
ank, na n’en deus ket he fedet
p’en deus badezet e vugel ken-
tañ kennebeut all. Mervel a raio
e vamm hep e welout, ha ne
deurvezo ket he mab dont d’an
obidoù zoken... Ur vaouez paour
e oa, galleg fall ha doareoù ur

beizantez ganti... « Mezh e yezh
ha mezh e vro / zo breudeur
gevell a-bell zo » a skrive Yann-
Ber Piriou... Ar c’hleñved-red-
se a zo e gor c’hoazh e Breizh,
muioc’h eget na greder anzav,
dindan ludu ar vodernelezh.

MbdB

TORKAD,
Dibab skridoù tennet a
lennegezh Bro-Gwened,
Kinniget gant Daniel Doujet
hag Anaig Lucas,
Al Lanv,
812 pajenn, 41€



Ur mennad zo stag ouzh
kement antologiezh zo, dre ar
bevennoù a vez merket dezhi.
Frouezh un dibab eo. Hag an
dibab-se, dres, a zo un diskoue-
zadur koulz hag un diskouez-
deg. E-barzh *Torkad* e kaver
skridoù liesseurt-kenañ tennet
eus lennegezh Bro-Gwened.
Eus ur pezh mell levr ez eus
anv, 812 pajenn ennañ. Lakaat a
ra anat ez eus bet ul lennegezh
distag ha fonnus a-gozh e gwe-
nedeg. Pevar-ugent skrivagner a
vez kinniget gant Daniel Doujet
hag Anaig Lucas, adalek kreiz
ar XVII^{vet} kantved betek ar rum-
mad nevez, gant David ar Gall
ha Patrick Drean. Un dibab n’eo

ken, avat, p’en doa renablet
Lukian Raoul 142 skrivagner e
1992. Adkavout a reer anvioù
brudet : Joachim Guilhom, Job
ar Bayon, Loeiz Herrieu, Loeiza
ar Meliner, Iwan an Diberder,
Yann-Ber Kalloc’h, Roperzh ar
Mason, Job Jaffre, Langleiz,
Sten Kidna, Herri ar Borgn,
Daniel Doujet... Ha kalzik
anvioù nebeutoc’h anavezet pe
dianav krenn : Pier an Arbouled,
Silvestr Seveno, Yann-Vari
Heneu, Pier ar Saoz...

Loeiz Herrieu a c’heller
lakaat da bennden ar gwenedeg,
bennozh d’al labour ramzel en
deus kaset da benn gant *Dihu-*
namb. Ha koulskoude ne lenner

ket kalz, hiziv an deiz, skriva-
 gnerien ar c'houlzad-se, tra ma
 lenner dalc'hmat skrivagnerien
Gwalarn. Herrieu, ar "barzh-
 labourer", a felle dezhañ chom
 tostoc'h ouzh ar bobl moarvat.
 D'ar mare-se e c'helle skrivañ
 « Ar Vreizhiz a vev dreist pep
 tra get div vicher : al labour-
 douar hag ar pesketaerezh »
 (p.402). Met ar bobl-se n'eus
 ket mui anezhi. Peseurt talvou-
 degezh en deus ar gwenedeg
 hiziv an deiz neuze ? Mat e vije
 bet astenn ar gaoz war ar c'hraf-
 se er pennad digeriñ, am eus
 kavet un tamm skort er c'heñver-
 se. Sklaer ha kempenn eo make-
 tenn al levr. Reolennoù pennañ
 ar gwenedeg a vez displeget
 berr-ha-berr. Gant ar reizhskri-
 vadur peurunvan eo bet adwis-
 ket ar skridoù, met n'int ket bet
 cheñchet e mod ebet a-hend-all.
 Talvoudegezh ar gerioù pe
 troiennoù lec'hel a vez resisaet
 e-traoù ar pajennoù. Berrik eo
 an displegadennoù diwar-benn

an oberourien hag an oberennoù.
 Ur choaz eo. Daniel Doujet hag
 Anaig Lucas o deus roet al lec'h
 uhelañ d'an testennoù. Deomp
 da dañva teñzor ar yezh hep
 beuziñ en evezhiadennoù. Kava-
 dennoù fromus a vo graet gant
 al lennerien a strano er c'hoadeg
 stank-se.

Tomm eo ar rummad skriva-
 gnerien nevez ouzh ar gwene-
 deg. Perak ne vefe ket ? Lod tud
 a soñj, gant gwir abeg, e c'hell
 bezañ dañjerus magañ variezo-
 noù betek re pa vez ken gwan
 stad ar brezhoneg dre vras.
 Techet on da grediñ e tostaio ar
 gwenedeg ouzh hor c'henyezh
 a-sil-da-sil, hep koll e arlivioù
 evit kelo-se. Piv en deus c'hoant
 ez afe da get livioù dibar galleg
 ar Gebekiz ? Ur skol doujañs eo
 ar gwenedeg, evit mad al lies-
 seurted e diabarzh hor c'hen-
 yezh, ha pa vefe unan vihan. Ur
 saour hep e bar hag ur broud
 efedus !

Mbdb

Rapaces de Bretagne,
gant Didier Clech,
dourlivadurioù gant Jean-
Pierre Guilleron,
Yoran Embanner,
176 pajenn, 28€



Ul levr brav eo al levr-mañ a-drugarez d'an dourlivadurioù ; ul levr kelennus eo ivez abalamour d'ar skrid... ha d'an dourlivadurioù a ya gantañ...

Teir lodenn a gaver a-zivout an evned o-unan : an evned-preizh deiz “bras” ; an evned-preizh deiziek “bihan” ; an evned-preizh-noz.

Evit pep evn meneget e kaver ur pennad hag un dourlivadur. Ouzhpenn-se a gaver en oberenn. Pep rann a echu gant ur pennad o stagañ evn-mañ-evn ouzh sevenadur Breizh hag ar broioù keltiek (Kembre dreist-holl). Daoust dezho bezañ dizingal e

tesker traoù. Ur pennad zo gouestlet da Edouard Lebeurier (1892-1986), unan eus pouezusañ natourerien a youl-vat an XX^{vet} kantved. Fiziet eo bet e zielloù gant François de Beaulieu e Dielloù departamant Penn-ar-Bed e Kemper. Daou bennad dedennus a gaver e dibenn al levr a-zivout emzalc'h an den e-keñver an evned-preizh, eus an distruj d'ar gwarez, adalek ar bloavezhioù 70.

Ul levr plijus eta hag un danvez prof a-zoare.

HL

NOTENNOÙ



**Annaig KERVELLA &
Tudual HUON**

HOR MIGNONED

Ganedigezh :

Gant levez e kemennomp deoc'h ganedigezh hon faotrig Awen Blejean, ganet eo d'ar 15 a viz Ebrel 2020 da 4 eur 22 beure. Gant e 53,5 santimetr hag e 3,840 kg ez eo ur paotr bras ha yac'h-pesk, fin e zremm, seder e vousec'hoarzh, digor-bras e zaoulagad hag e galon.

Abaoe m'eo deuet d'ar gêr ez eo bravoc'h an ti ha frondusoc'h bleunioù gwenn-kann ar wezenn-gerez. Plijout a ra dezhañ bezañ luskellet gant kanaouennoù e brezhoneg... Ha lorc'h zo ennomp o kemenn ez eo deuet tre en hor bed hag en hor yezh.

Kañv :

Glac'haret omp o kemenn deoc'h eo aet da Anaon Erwan Evenou d'an oad a 80 vloaz. Deus perzh e vugale : Nolwenn, Gwenola, Gaidig, Gwendal, Céline Laot, e verc'h-kaer ; Anna Wlagen, bet e wreg ; e c'hoar Annick Evenou, e c'hoar-gaer Nicole Evenou, e nizez hag e nized, e vugale-vihan hag ar familh a-bezh.

En abeg da stad an traoù er vro eo bet lidet an obidoù gant ar familh hepken, er Faoued, d'ar 5 a viz Mae.



© AGK

Gant souezh omp bet kelaouet e oa aet Erwan Evenou da Anaon. Ganet e oa bet e 1940. Ur stourmer eo bet e vuhez-pad. E 1969 e oa e-touez ar re o doa savet GALV. Ezel e oa bet eus UDB. E 1973 en doa bet ouzhpenn 3% eus ar mouezhioù pa oa bet war ar renk er Faoued evit dilennadegoù ar gannaded. Kelenner war ar saozneg hag ar brezhoneg e oa. Enseller pedagogel evit ar brezhoneg e oa bet un nebeud bloavezhioù. Anavezet e oa dreist-holl e bed ar gouren bet darempredet gantañ tost da 50 vloaz. Krouer ha prezidant kentañ Skol Gouren Ar Faoued e oa bet. Prezidant Bodadeg ar Gouren oa bet ivez hag e anv ar gevredigezh-se e oa bet ezel eus Kuzul Sevenadurel Breizh.

Ra vo skañv douar Breizh evitañ.

Erwan Evenou hag Al Liamm

E niverenn 58 AL Gwengolo-Here 1956 e kaver e-touez an notennoù ur « Galv d'ar Yaouankiz » o c'houlenn « digant ar re yaouank etre 10 hag 20 vloaz a gomz pe a zesk brezhoneg ober ur gevredigezh, dindan paeroniezh *Al Liamm*. Al Liamm a liammo hag a harpo ac'hanomp. Embann a ray zoken hor skridoù ». Sinet gant Erwan Evenou, 64 Boulevard Saint-Saens, Alger...

E dibenn an niverenn 59 e kaver ur gerig kinnig gant Ronan Huon o kemenn krouidigezh *Pajenn ar re Youank* (sic). Ur pennad savet gant « re yaouank » a ro keloù eus krouidigezh *Kevredigezh Ar Vrezhonegerion Yaouank* (KAVY), notennoù diwar-benn he mont en-dro ha *Pajenn ar re Youank*. Roet e vez daou chomlec'h, hini Y.L. Perot e Dinan hag E. Evenou bepred en Aljeria...

E niverenn Genver-C'hwevrer e 1957 e ro Erwan keloù eus KAVY en ur rann anvet *Pajenn ar re Youank* niverenn 2...

Ingall e kaver *Pajenn ar re Youank* er gelaouenn betek niverenn gentañ 1963, dindan renerezh Erwan Evenou bepred, a oa e chomlec'h er Gemene d'ar mare-se. Un hir a genlabour eta.

Un darn eus levrioù bet savet gant Erwan Evenou :

- *Benn gouloù deiz* - barzhonegoù - 1972 - bet embannet gant E. Evenou - 56 p.

- *Studi fonologel brezhoneg Lanijen* - 1987 - tezenn doktorelezh - Skol-veur Roazhon 2

- *Nikolazig ar broioù tomm* - romant - 1991 - Mouladurioù Hor Yezh - 336 p. - Priz Langleiz 1992

- *Pardon Sant Fiag* - romant - 2007 - bet embannet gant E. Evenou - 336 p.

- *Bugale milliget ar baradoz kollet* - romant - 2018 - Al Liamm - 196 p.

Studiadennoù ha levrioù all en deus bet savet e galleg.

D'ar 6 a viz Mae eo aet Yann an Du da Anaon d'an oad a 82. Eus Plougouskant e oa. Ezel e oa eus ar CRBC e Brest. Embannet en deus un toullad levrioù ha studiadennoù diwar-benn ar yezh. Kaset en doa war-raok meiziad ar “Badume” ha dibabet en doa sklaer skrivañ e “skolveurieg” (pe falc'huneg).

PROFOÙ _____

Miz Ebrel : Iwan AR FUR ; Luc BIDEL ; Maryvonne CUDENNEC ; Yann-Fañch KERNEIS ; Jan-Maï ha Maï-Gristin GWERNHALEG ; Marie-José ALANOT ; Paol AR MEUR ; Michel MANAC'H ; Paskal TABUTEAU ; Erwan-Weltaz VALLERIE ; Armelle LE CALONNEC

— War un dro : 191€

Miz Mae : Magali BARON ; Francis GOHIN ; Dr Yves GOURVES ; Yves Kernalegenn ; Mikael BERTIN ; Pol Yvon VIROT ; Paskal HERVIO ; Patrice DREANO

— War un dro : 240€

*Mil drugarez a lavaromp ur wech ouzhpenn
d'hor skoazellerien.*

PRIZIOÙ DAZONT AR BREZHONEG _____

Gant ar c'hleñved-red Corona Virus n'eo ket bet lidet Prizioù Dazont ar Brezhoneg war an ton bras. Roet eo bet an disoc'hoù gant Mael Gwenneg, rener an abadennoù brezhoneg e France 3, etre al Lun 18 hag ar Gwener 23 a viz Mae, da 11eur50 ha da 18eur50 a-raok ar c'heleier war ar chadenn rannvroel.

Aozet eo Prizioù Dazont ar Brezhoneg gant France 3 Breizh, Ofis Publik ar Brezhoneg gant perzh France Bleu Breizh-Izel ha France Bleu Arvorig.

Izili ar bodad-barn a oa evit ar bloaz-mañ : Ewan Thebaud, kenurzhier sevenadurel e Sant-Ervlan ; Manon Renault, merourez *Kaouenn*, ur stal produiñ ha filmañ ; Hoel Maleuvre, levraoueger e Karaez ; Roland Martot, implijad en deskadurezh

katolik ; Janig Bodiou, war he leve, bet kelenner e Kembre ; Olier ar Mogn, rener skiantel Ofis publik ar Brezhoneg ; Katell Peron, implijadez e *Ti-Douar An Alre*.

Setu amañ an disoc'hoù :

Kevredigezhioù :

- 1 - **Mignoned ar Brezhoneg**, STAL.bzh, lec'hienn hag arload gant roll kenwerzhourien a ra gant ar brezhoneg.
- 2 - **Gouel Kan ar Vartoloded**, ar yezh war-wel e-kerzh ar gouel e Pempoull.
- 3 - **Keit Vimp Bev**, evit ar gelaouennig nevez *Toutouig* evit ar re vihan-tout.

Strollegezhioù :

- 1- **Ti-kêr An Henbont**, brezhoneg er skolioù, savet ur c'hoari evit an holl *C'hoari mar plij*.
- 2- **Kumuniezhioù kumun Kemperle**, savet ur politikerezh yezh hag ur bodad evit heuliañ kement-se.
- 3- **Ti-kêr Kemper**, skoazell evit an Ñ en anvioù brezhoneg ha ledanaat implij ar brezhoneg e Kemper.

Embregerezhioù :

- 1- **SA Union Jeanne d'Arc Phalange Quimper** (UJAP 29), diorren ar brezhoneg e bed ar sportoù.
- 2- **SARL Biocoop Douar Nevez Karaez**, panellerezh e brezhoneg er stal.
- 3- **Scop Roudour**, stummadur nevez *Ambroug* evit deskiñ brezhoneg a-bell gant ostilhoù ar rouedad urzhiataer.

Levrioù :

- 1- *Beuzet diwar ar pont bras... ha danevelloù all* - **Yann-Fulub Dupuy** - An Alarc'h Embannadurioù
- 2- *Chuchumuchu* - **Erwan Hupel** - Al Liamm
- 3- *Lucio e-kreiz K.* - **Annie Coz** - Al Liamm

Oberenn kleweled :

- 1- *Yann-Fañch Kemener, tremen en ur ganañ* - teulfilm, **Ronan Hirrien** - F3
- 2- *Tro baz Alan Abgrall* - teulfilm, **Bastian Gwilhoù** - F3
- 3- *Skiantoù sichant* - rummad diwar-benn skiantoù - **J. Posnic ha PY Le Du** - JPL Films

Pladenn kanet e brezhoneg :

- 1- *Dindan dilhad dindan* - **Quartet Talec-Noguet** - Coop Breizh
- 2- *Eben* - **Eben-Jonathan Dour** - Coop Breizh
- 3- *Ebel* - **Ebel elektrik** - Autoproductions Florian Ebel

Brezhoneger-ez ar bloaz :

- 1- **Solena Raynaudon-Kerzerho**, ergoterapeutourez a ginnig staliou pareañ e brezhoneg.
- 2- **Perynn Bleunven**, kanerez-c'hoarierez-sevenerez.
- 3- **Roderic Halleguen**, fentigeller a ginnig abadennoù war ar rouedad.

Gourc'hemennoù dezho holl !

A FER AN Ñ WAR ANV UR PAOTRIG E PABU _____

D'ar 15 a viz Mae e c'hane Awen e Pabu. Fañch eo e eil anv. Nac'het eo bet gant servijoù ti-kêr Pabu skrivañ an eil anv-se gant un dildenn. Savet o deus klemm tud ar babig. Maer Pabu en deus roet da c'houzout e oa krenn a-du gant kerent ar bugel. Un dra gaer ! Goulennet en deus neuze Pierre Saliou digant servij an ti-kêr adsevel un akta a c'hanedigezh, reizh ar wech-se. Ar pezh zo bet graet ha roet da c'houzout d'ar 7 a viz Mae. Met gant doareoù amsklaer ar servijoù Stad e ranker chom war evezh. Un toullad brav a dud o deus skoazellet tud Awen.

AR REDADEG

E 2021 e vo dalc'het ar Redadeg a-benn ar fin, etre an 21 hag 29 a viz Mae. Ar memes hent a vo miret. Loc'hañ a raio eus Karaez evit erruout 8 devezh goude e Gwengamp.

Tu zo c'hoazh da brenañ kilometroù evit ar bloaz a zeu en ur vont war o lec'hienn: *ar-redadeg.bzh*.

KAMPOÙ AN HAÑV

Pa skrivomp ar pennad-mañ ne ouiomp ket c'hoazh hag-eñ e c'hello skipailh an UBAPAR aozañ kampoù. Reoù zo a zo bet nullet c'hoazh : ur c'hamp e Bro-Euskadi gant krennarded, ar c'hampoù er roulotennoù, ar c'hampoù surf e Kloar-Karnoed hag ar c'hamp war velo etre an Uhelgoad, Konk-Kerne ha Rosko. Marteze e vo reoù all nullet ouzhpenn, hervez ar reolennoù yec'hedoniezh. Tu zo da enskrivañ bugale memestra, ar chekennoù a vo enket da zeiz kentañ ar c'hamp nemetken.

Evit kaout titouroù all: <https://www.ubapar.bzh/>

pe dre bostel: dudi-laizi@ubapar.bzh

AR SEVENADUR E KRABANOÙ AR C'HOVID19

Diaes en em gav ar c'hevredigezhioù n'hellont ket kas o labour evel da gustum gant kleñved ar C'horona Virus hag an divizoù lakaet e pleustr evit talañ ouzh ar c'hleñved. Klask a reont kas o labour war-raok, an implijidi o vezañ o labourat er gêr alies. Labour ha kenlabour da vestroniañ en un doare ispisial ha ket anat bepred. Met mennet eo pep hini e bed ar brezhoneg.

NANN, TRUGAREZ _____

E Lokorn emañ Orange o klask sevel ur pezh mell gwern 5G. Ur gevredigezh a zo bet savet evit enebiñ ouzh ar raktres-se. Tud mennet start a glask chom noz-deiz war al lec'h bet dibabet evit ar savadur-se. Seurt gwernioù a zo kudennek war veur a dachenn : yec'hed - ekologiezh - dibaboù teknologel mantrus hag implij energiezh forzh pegement, un amzer da zont eus ar gwashañ.

collectiflokorn.org

**DIFAZIAÑ « MADALEN » (AL NIV. 439)** _____

Diwar fazi e oa bet reizhet ganeomp barzhoneg Yann Mezarvro « Madalen » :

kollet oc'h Madalen
 Peurlonket gant aezhenn al loc'h
 Etre Kergazegan hag ar roc'h
 Ha **me** muzelloù kamm
 (a ranker lenn ha n'eo ket « ma muzelloù kamm »)

LEVRIOÙ BREZHONEG E-PAD AN HAÑV _____

Digor e vo burev Kuzul ar Brezhoneg e Lannuon war ar pemdez e-pad an hañv. Un distaol a vo graet d'ar re a yelo betek eno hag a breno levrioù.

Evit gouzout hiroc'h : kab@brezhoneg.org - 02 96 48 03 00

GERIOÙ NEVEZ _____

Klevet e veze komz eus ar C'hovid19 abaoe penn-kentañ ar bloavezh, ha setu ni e-kreiz miz Meurzh, rediet da chom er gêr, pep hini e-barzh e di, hep gallout mont neblec'h. Ha setu me o klask deskiñ ur ger n'anavezen ket, e galleg *confinement*. Met dre glask war lec'hiennoù, klevet tud, selaou radioioù, lenn pennadoù hag all... n'eo ket ur ger 'm eus kavet, met meur a hini ! Gerioù liesseurt ha liesliv !

- * Enkadur, Enkañ, Bezañ enkaet
- * Kenfinañ pe Kefinañ pe Kenfinadeg, Bezañ kenfinet
- * Bezañ kufunet, pe Bezañ e kefin
- * Kraouiañ, Kraouiadeg, Bezañ kraouiet
- * Kognañ, Bezañ e kogn an oaled pe an ti ?
- * Bac'hadur, Bac'hañ, Bezañ bac'het
- * Kroufañ, Bezañ kroufet
- * Konfinamant, pe Kofinamant, Konfinañ, Bezañ konfinet

Bremañ 'vo ret din dibab unan anezho, met pehini ?

Yves-Marie Braz

